

Ar Minor (Version Fest-Deiz des Ateliers)

- 1 Abaoe an oad a dri bloaz, me a zo maget minor
Me a zo o vont da ziskleriañ ul lodenn deus ma zort
- 2 C'hoand am-eus da ziskleriañ un darn eus ma buhez
An amzer `m-eus tremenet, beteg an deiz hirie
- 3 Gand an derjenn a gredan e oa maro ma zad
Ma mamm a chome intañvez m'he-dije kalonad
- 4 Chomet ma mamm intañvez gant he seiz krouadur
He c'halon oa febliset gand an displejadur
- 5 **Seiz bugel a chome ganti deuz ar-re yaouankañ
Ar c'hozhañ a oa unnek bloaz, me ne oa `met tri bloaz**
- 6 **D'an ampoend e oan yaouank, bihan ma jagiten
Met hallas ne oueien ket petra (a) oa da dremen**
- 7 **Deuz ar mintin pa zaven, me `mije kalonad
Pa teue ar zoñj din-me e oa maro ma zad**
- 8 **Met ma mamm plac'h a gouraj, honnezh ma c'hoñsole
Ha lavare din bemdez `mijeur bragoù nevez**
- 9 **Graed e oa din ur bragoù e oa graet gant lien
Met heñvel ar giz gwechall evid ar baourien**
- 10 Gwisked em `moa mabragoù aed e oan da bourmen
Da zouetiñ ar bloavez mat d'an holl amezeien
- 11 Bed am `moa bet gwenneien, bed am `moa avaloù
Hag an dud a lavare din e oa drol ma bragoù
- 12 Ha hennezh oa ur bragoù ha ne oa ket graet prop
Rag un hanter deuz e foñs a oa lakaed a-raok
- 13 Rag ar bragoù (a) oa graet din, ya gant ma c'hoar goshañ
Ne oa ket kemenerez, n'ouie ket da dailhañ.